

- 23 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

94. GWERS AR GWIGN

(follennou 11-20)

Sellaouit oll, Bretonnet, klevit eun exempl erruet
breman ez eus eun neubeudik amser
gant eun den iaouank demezet.

Pa voa e vonnet da pedi an dud da assista en he euret
tremen a eure dre an hend bras
eun den krouget a rankontras
a voa var an end espoiset
evit e krim ag e torfet

An den man evel mar goelas
en eur wela e lavaras :
- Petra e kement-man, ma c'hamarat,
Goech all ni a zo en em garet
Me garche vichez ar c'henta
doc'h assista en euret.

eb e chonjal e droug e bet
e veach en deus cuntunuet
Pa voa deud an deis ma voa an euret
ag an dud deus an dol assemblat
e harias ive an den krouget
ag o lakas oll estonet.

en pen an doll e neum lakas
Kals eus e vellet a semplas
pe deus laret dar kompagnunes :
- peus ket affter da epouvanti
Me ne vijen ked deut aman anez ma oc'h bed doc'h va
fedi.

An tan dioutan a sinklas
pere a sullias an abijou,
bleo ar goazet, koeffou ar merc'het
eb ma hellchont dribi nag eva
an dud dar ger zo e neum tenet.

An den nevez epouvantet
e velet ar seurt tra erruet
ma chonjas en nos e c'heuret
antronos qwitat e briet.

- 24 -

en devoa aont na vije kemeret
gant ar justiç a punisset
evel nan devoa ket diskleriet
e voant bed o daou kamaradet.

Da c'houlou deiz e partias
e lec'h ma karie Doue e gass.
Pel bras e bed e valle
a bars goulen kondition.

Dar fin en em kavas magnifiq
gant eun otrou ag eun itron.
Laget e voa eno da pourveer
a memeus da den a haffer.

eus pas deus a pem blaz varnugent
en deus i lezet e intanvez
eb kousket ganti nemet eun nos
dre chanç e neum kavas dougerez

eus paz deus a pem blas varnugent
en deus gret servich exellent
eb ober pris na commanant
an oll doc'h outan voa kontant.

beb bloas er pede an otro
D'ober pris gantan ha hajou
Ag e responce dezan humblamant
e neur zont de trugarekat.

- Serten me ne meus affe netra
Nemet eb ken o grasso mad.

An den man nevoa eun ure
Dre kousk an noz en e wele.

Deus e tad ag e vam ag e briet
- Siwas me a kred int maro
red e din mond dar ger da velet.

Antronos mintin pa savas
Digant e vest a houlenas

e gonje ma voa e vadelez
a kerkoulz digant e vestrez

ma lakan tud an ti klaharet
dezan ag en tristidigez

- 25 -

- Ma mignon bras, kent om quitat
 Poas bara dem c'hoaz eur forgnat,
 gra eur gwign en feçon ma oat kustum
 a digas i din da blada

Ag onnez a dalc'hin em armel
 Ken a kommanso loueda

bed blas° e nombre an otro °kompren : bep bloaz
 Pez a c'houneze a c'hajou,

Ag oc'h e veza eun den onest
 gant aont veza gant Doue blamet

A lakas er gwign se en aour melen
 e oll blavechou ed a ed.

Pa voe deud ar poënt da kimiada
 e vestr a c'houennas digantan
 pegement a dlee dezan.

Ag a respontas dezan humblamant
 en eur dond de trugarekat :

- Serten ne meus affer netra
 nemet eb ken ho grassou mad.

An otrou en eus komandet
 reï dezan en eur serviet
 gwin a bara da neun sebeilla
 evel ma kemerche netra.

Ag eur pes daou skoet en he hodel
 pa voant e neum vriata :

- Tri dra meus did da komandi
 Rag se ne vank ket da hober
 Servichout a raï did, va mignon,
 Goëlet a ri gant an amzer.

Va drompill chase a roan did
 ma c'hoarfe did klevet neb brud
 he skoï eun tri pe pevar tol trompill
 e pelaïo diouit an danjer.

- 26 -

Va c'hwign a roan did a prezant
 ne vank ket de c'hass dar ger
 En kenta plass ma heani
 Goël ag ar ieod a vo savet
 Sign ar groas a lakaï en ta kerc'hen
 Ag en anon Doue eneum armi.

En kenta plass ma heanas
 Goude kemeret e repas
 Ma savas evid mond adare
 eb e sellas tam var e dro
 e gwign a ankonac'has er plas-se
 Ag en ed dija eun anter leo.

Var e guis e bed retornet
 Dre eur chans e deus i kavet.

eun devez all e vond dre eur c'hoat
 arrog dezan e klevas en gri
 ma skoas tri pe pevar toll trompill
 en eur instant e deuas da sessi.

Souden daou zen a rankontras
 leun a c'hoad a deplorabl bras
 Ma houlenas petra voa ar malheur
 Diskleria rejont dezan :

- Allas, otrou, ni a zo maltraitet
 a laeret gant ar vollerien.

Ni a hal sur trugarekat
 An eb a zo bed e trompillat

rag pa devoa klevet trous an trompill
 e devoa komanset an dud véchant
 Da laerez diganem ar bae
 goude kemeret on arc'hant.

Gant truez goelet o huken
 e roas dezo an alluzen.

En eur lavarout outan e hunan :
 - Daou tra zo dija erruet
 peur benag e harue an dredé
 Doue dam preservo pepred.

- 27 -

En e barez pa haruas
 en eun ostaliri a diskennas
 ma houlenas outo da leïna
 Memeus oc'h toll er guegin
 evid interoji an histor
 deus komançamant pete ar fin.

Kleve° a re as tillikat °kompren : klevet
 e voa maro e mam ag e dat
 e briet e voa iac'h magnifiq
 e parlant deus e mab beleg.

Mar karje er ger beza chomet
 in ne devoa bed tam klasket
 e briet en devoa eur mab
 ag a voa gati desket mat.

Pa voa deud en oad da kass dar studi
 Memeus evid beza belek

I a leke kundai e ziegez
 Deus e mab en devoa ar sousi
 Kemeret a re evid labour
 mevel a plac'h a voa gati.

En instant man deveus leïnet
 Ag e ze dija rapportet
 e ia da goelet e briet
 Allaz hi ne anaïe ket,
 ag evid beza enon divezat
 e c'houlenas beza lojet.

e briet a respontas neuze :
 - neket bras ar c'homodite
 evel ma zéo, otrou, mar souhetet
 chomet ag e vec'h lojet
 me karje e vije bras ma fouvoar
 evit galout o diguemaret.

In e aidas a c'halon vad
 Da kemeret digantan ar pakad.
 Gregi a raz digantan ar pakad
 evid e lakad en e frez
 in a ias da dall an tan da toman
 Karget a laouenediges.

- 28 -

Pa entreas e ti e mab beleg
e ias trist ag e voa estonnet.
an droug speret a deuas de tenti
da lakad chonch fal deus he briet
e chonjas e voa den fall ar belek
a deue enon de darempret.

Sortial a re e ber amzer
A dost enon voa eur c'hoël :
- en non Doue, va mignon marichal,
gra dime eur c'hontel, emezan.
A varc'hoas pa mo gred arhant
Me rai ar voien da pea.

Koania rejont assemblez
ag en eur memeus kompagnuez
eb ma c'halvas e mam ar belek
na ken nebeut e vam ar mab.
ma neum resolvas da laza
an noz-se an den miserabl.

En instant mo devoa koaniet
e has de gamb gant ar beleg
enon memeus e voa daou vele
en e voa laked e hunan.
Ar beleg a gouskas buhanik
ag en ne re ked re vuan.

Ma sentas kousket ar velek
Deus e goële e diskennet

Ag in da kichen goële ar belek
ar gontel en e zorn gantan,
ten an dillad diwar e peutrin
en esper gati e laza.
inspiret gant Doue e chonjas
c'hober da genta sin ar groas.

Ar belek a losk teir kriaden
e neur lavaret var boëz e ben :
Fors! eman va zad eus va laza,
va mamik paour deud dam difen.

e vam, ar mevel ag ar plac'h
gant klac'har a pignas dan ec'h
gant ar goulo ag en eur voela
ma digor var e mab belek
Allas, emezi, me a vel dre o c'hure
penoz e maro ma vriet.

- 29 -

e mab ar belek a savas
 De gonzoli e nem lakas :
 - va mam, kemeromp patientet
 lekomp om fichans en Doue.
 Mar de marc va zad ni a pedo
 Jesus da reçeo e hene.

An histor evel ma klevas
 deus e vele a diskennas
 ag e neum strinkas war e zaoulin
 Da c'houlen pardon dious e vab
 Ag ive deus e briet :
 - Me a zo eun den miserabl.

Ag eveze el lec'h pardon
 on gleour deus a punission

Setu me exposet dirazoc'h
 greed o tever evel ma e gleed.

Kontant bras on da souffr ar marc
 just e pa e meus meritet.

A pebez joa a kontantamant
 e voa er gamb en eun instant
 Pa en eun anavezchont evid briechou
 Ag ar beleg evid o mab
 e deuchont o tri da neum briata
 gant eur garantez admirabl.

Antronoz pa voant e leïna
 en o plijadur ag e joa
 e c'houlenn digant e briet ar pakat
 evit kaout ar c'hwign da troha.
 Kant louis aour vòa kouet a nezi
 eb ma vouie voa netra eni.

Dar sul varlec'h e hofferenas
 o mab gant magnifiçans vrás
 Grass dem da veza partissipant
 partout en e oll sakrifissou.
 Grass Doue da neum velet er barados
 da veuli Jesus er joaiou

vvvvvvvvvv

Jannton ar Charles, neerez eus a Taole,
 10 févr. 1851

vvvvvvvvvvvvvv